

AR BINIOU

MEMEUZ TON EVEL EN GALLEK

Deus korn ma yalc'hig ar paoura,
P'hini meus furchet gant doan,
Meus tennet awalc'h 'vit prena
Eur biniou Kerne moez voan :
War lanneier Breiz burzuduz
O na koanta tonniou skiltruz !
A gousk hor c'haloun hep mar,
Hor poanniou hag hor glac'har !

DISKAN

Ar glac'har n'eo met follentez,
Ha nep her jilaou 'zo sot mat, m'hen tou.
Te zidu d'in ma c'haloun gaez !
Biniou, kaez biniou ! ô kaez biniou !!

Oll gantan omp leun a frëdon :
Ann ëvned a zedera ;
Ann ekleo hadlavar he son ;
Avel zioul 'zalc'h d'e c'heuilla ;
En trô drô deomp eur joa diboell.
Omp sklap en kreïz eur vüez well :
C'hoarz ha gouel d'an nep a gar :
Plijadur kreïz ar glac'har !

Met ar pez a goust d'am godel
Vo gorek o tont en drô,
Ha kalz a anken c'hann da hell
Ar zonch outan am lëzo :
Ma bissac h goullo en daou benn
Neubeutoc'h a jistr em lôchen
Hag eun deïz a wall, piou 'oar,
Ann naon kriz gant ar glac'har !

Met pa deuï ann Nevez Amzer
Gant pardonniou yë ma bro,
Deuz a Wened da Landreger
Me n'em dapo tro pe dro :
Rag deus son ma biniou sklinton
An oll 'zanso skanv ha lirzin
Ha kreïz eur stâd ken dispar
N'o mui na boan na glac'har.

Charles ROLLAND,
à Werleskin.